

*Doelle 66/1*


*Pres 2001 94*

BENEDICSION


CHAPEL NEVEZ TREZIEN

E PARREZ PLOUARZEL

10 A VIZ MAE 1877



Var don : *Les-Breiz.*



1

Canomp en eur vouez, canomp, kristenien,  
Gloar d'hor patronez, Introun Trezien. *bis*

2

Ar feiz en Arvor biken ne varvo ;  
Ma n'her c'hredit ket, deut ama hirio. *bis*

3

Deut da Blouarzel, d'an draonien distro  
E tal ar mor braz, Trezien he hano.

4

Eno eur chapel, enor ar barrez  
A zo beniguet gant calz levenez.

5

Coant ha direbech, din a vam Doue,  
Chapelic nevez, piou 'ta n'az carfe?

6

Douar burzuduz gant Mari caret,  
Te zo e Leon dre vir vad brudet.

7

Pa c'hoez an avel, merc'het an Arvor  
'Vit eul lestr caret a c'houlen goudor.

8

Ar martolot paour ne c'hell mui, siouas !  
Torret guern ha stur, he ren er mor braz.

9

D'ar garrec ez a !!! Nan, nan, ar Verc'hez  
'Ra var al lestric eur zell a druez.

10

O vont da veusi, ar vartolodet  
A zo da Vari oll en em voestlet

11

Kerken eo couezet counnar an tarziou,  
Ar verelaouen a bar en envou.

12

Eun tad, eur buguel, eur breur, eur pried,  
D'ho c'herent euruz iac'h-pesk zo rentet.

13

Da zeiz ar Pardoun deut oll d'ho guele ;  
E ti ho Mam vad ez int daoulinet.

14

Arvor da Vari a ro carantez,  
Caret eo ive e barr ar menez.

15

A bep tu guelit kristenien fidel  
O tont d'he meuli betec he chapel.

16

Enor, trugarez da Voeled Leon,  
Trugarez dreist-oll, enor d'har c'hanton !

17

Oc'h peb seurt enerez a gorf, a speret,  
Mari, mam dener, c'houi o peuz remed.

18

Prisounier guechal e bro an Turket,  
Eur soudart kristen en deuz ho pedet.

19

Digor he brisoun, torret e jadenn  
Ehars oc'h aoter e tihun souden.

20

Da beden eur vam, askell ar maro  
Dioc'h eur buguel ker buhan a zistro.

21

Epad hurr amzer eur c'heas clanvour  
Digant tud guesiec a c'hede sicour.

22

Goulennet en deuz mont d'ho ti, Mari,  
Ractal eo cresket nerz he izili.

23

D'ann ene kristen ar c'haera tenzor,  
C'hui oc'h euz miret vertuz hag henor.

24

E Lourd, er Saleet e rit miraclou  
Evit da Jesus gounit eneou.

25

Gant fisians ive, guir belerinet,  
Ni ho ped hirio ; Mam, hor zelaouet !

26

Mam a vir zicour, Introun Trezien,  
Diouallit ar Pab, Tad ar gristenien !


Mam drugaresuz, Mam a esperans,  
Diouallit hor bro, rouantelez Frans !

Grit d'eomp ato, er bed n'eur dremen,  
Senti ous Doue, carèt he Iezen !

Sur euz ho scoazell, en eur hor maro,  
Da lezvarn Jesus seany ni a gerzo.

Evel goulmic o vont da repos  
Hon ene nijo eün d'ar Barados.

## EUR PARDOÜNER.



TOUS DROITS RÉSERVES

Par autorisation de l'auteur,

PH. DERRIEN